

KURE BRELEVENEZ

A oa bet lazhet c'hwec'h gwech.

Ur wech e oa, ur wech e vo,
Evit reiñ roll d'an holl gaozo.

Nag eus mar na kistion

E oa Dogan ar c'hampion

Piv a zo kaoz,

Met ar Gampionez kozh ?


**FANCH
an uhel**

STRIKES AGAIN !



Ur wech e oa e bourk Ploubèr,
e-kichen Lannuon, ur wreg koant
dimezet d'ur barazer anvet Jakez
Toudig. Ur c'hanfard.

Ar wreg-mañ ac'h eas da
gofesaat un deiz gant kure
Brelevenez. Hemañ a gare ar
merc'hed koant, hag ar gwin
ivez un tammig, ha goude en
doe kofesaet ar wreg e lâras
dezhi ma karje dont da gous-
ket gantañ un noz, e roje kant
skoed dezhi...



sakramant ar Blijadur !
taolenn IV.

Homañ a zeuas kuit ne lâras netra d'ar beleg.
Met pa voe erru er gêr e lâras d'he den...



Mont a ra en-dro ar wreg da
gofesaat an deiz war-lerc'h,
gant kure Brelevenez. Met
a-raok e voe graet un diviz etre
an daou bried penaos da noz,
pa vije deuet ar c'hure en ti,
hag en prest da vont er gwele,
diwisket e zilhad gantan.
Jakez a skoje hag a raje trouz
war an nor, hag e vije kuzhet
ar c'hure en ur varrikenn didal
a oa en ti. Goulenn a ra en-dro
ar c'hure ar memes tra digant
ar wreg.



Ha pa voe o vont da lamat er gwele,
goude bezan roet ar c'hant skoed d'ar wreg,
setu trouz war an nor...

DAO
DAO
DAO!

Jezuz !
Petra
eo ?

Allas ! Jakez eo
sur, anavezout a ran
e daolioù !!

Panel 1:

Man: RAH !

Woman: DIGOR ETA, JANET, HA HAST BUAN !

Man: Ya, ya, met gortoz un tammig, rak aet on em gwele !

Woman: O, ma Doue. Kollet on, pelec'h en em guzhat ?

Panel 2:

Woman: Kit buan 'barzh ar varrikenn didal-se ! Aze ne vefet ket gwelet !!

Mont a ra ar c'hure 'barzh ar varrikenn didal, ha Janed a zigor da Jakez.

Me a sonje din ne vijec'h ket deuet d'ar gêr fenez ?

Ya, met Fañch Buzhulzo ne ro peoc'h ebet din gant e varrikenn a zo aze, hag e vo ret din labourat e-pad an noz evit talan ar varrikenn hag he c'has dezhan warc'hoazh. Hastit lakaat dour war an tan da virvin, evit teurel e-barzh.

Ar c'hure paour ne lâre ger en e varrikenn, met hini ac'hanoc'h n'en dije karet bezañ en e blas. Pa voe bervet en dour, e voe taolet er varrikenn, hag ar c'hure ne lâre ger ebet.



Ma voe poazhet eno evel kig er pod-houarn, ar paourkaezh !

LAZHET 'TEUS
KURE BRELEVEZ !

Den fall, bremañ e
vi lazhet ivez !

Ya !

BA ! BA !
Bet 'teus ar
c'hant skoed ?

Mat eo
neuze an dro ;
bezet hep doan
ha ma list
da
ober !




Kas a ra neuze ar c'horf-marv
d'an tour, dindan ar c'hleier.




hag en em laka da soniñ ar c'hloc'h
bras. P'en doa sonet ur pennadig ec'h
eas kuit, hag e lezas ar c'horf eno,
harp ouzh ar voger ha kordenn ar
c'hloc'h gantañ en e zorn.









Ar Sakrist a roas kant skoed (degaset en doa ar c'hant gantan) hag ec'h eas kuit, ne voe ket ezhomm da lâret dezhañ div wech. Jakez a sammas neuze ar sac'h war e choug, hag ec'h eas gantan da Vrelevenez.

Pa voe erru eno e tennas ar c'horf-marv e-maez ar sac'h, hag en lakaas en e sav, harp ouzh dor ar presbital, ha neuze e tistroas d'ar gêr...



??!!



An deiz war-lerc'h ar beure, pa zeuas maezh ar person da zigeriñ an nor, e kouezhas ar c'horf-marv warni. Hag hi da c'hervel ar person ha da grial.

**AOTROU PERSON!
AOTROU PERSON!**

DEUIT AMAÑ BUAN !
EMañ AR C'HURE WARNON
HA NE SAVFE KEN !



Ar person, pa glevas, a zeuas e-maez e wele, ha d'an traon ! Degouezhet er porzh e kemeras ur grennenn, ha setu en da

vazhata ar c'hure ha start !

Me ho tesko, kanfard, ur c'horfad, me 'oar vat, a zo ennoc'h adarrel⁽¹⁾



Pa voe skuizh o skein, e paouezas ivez, ha 'vel na lare ger ar c'hure, ha ne fiae ket



Jezuz Doue !
lazhet em
eus anezhañ
'm eus aon !

(1) Ar c'hure paour, evel am eus laret deoc'h c'hoazh, a blijfe dezhañ ur bannac'hig...



A ! Pebezh gwalleur !
Lazhet ganen ma c'hure !

Jezuz ma Doue
ha gwir e ve !

Ya, siwazh din !
Mar karez ma
dizober anezhan
Jakez keizh ?
Deuet eo ganin
aze !

Penaos ma Doue ? Sonjit, eta
Aotrou Person, kaout un den
lazhet 'barzh ma zi,
ur beleg !

Gra se evidon,
Jakez keizh, ha me
a roio dit daou c'hant
skoed !

Ma, roit din
an arc'hant,
lest ho sac'h
aze hag it
kuit.

Ar person a roas daou c'hant skoed hag ec'h eas kuit gant e vatezh,
ha buan. Kezeg an aotrou Koadilio a veze e-pad an noz o peurin
er parkoù, war vord an hent bras. Jakez a gemer ur gordenn,
a samm ar c'horf-marv war e chouk, hag ec'h a gantan d'ar park
'lec'h ma oa ar c'hezeg...

Erru eno, e stag anezhan
start war gein ar marc'h
hag e teu neuze d'ar gêr.